

LILI MARLÊN

1

'Tal ar c'hazarn bemnoz,
Kichen an nor vras
'Vezen ouzh da c'hortoz
Dindan al letern glas,
Eno fenoz evel gwezhall
Ouzh da c'hedal e vin gant mall,
Vel kent, Lili Marlên
Vel kent, Lili Marlên.

2

Diouzh hon daou skeud stardet
Un'n ne weled ken.
Nag em eus da garet !
Hen goût a rae pep den.
Ret eo d'an holl gwelout fenoz
E vimp dindan al letern kozh
Vel kent, Lili Marlên,
Vel kent, Lili Marlên.

3

Son a rae ar c'hlêron,
Sentin a oa ret
Pe e tapjen prizon :
Chom pelloc'h n'hallen ket !
Neuze diouzhit e tec'hen kuit
P'am bije bet c'hoant mont ganit,
Ganit, Lili Marlên,
Ganit, Lili Marlên.

4

Hag al letern karet
Gant va Lili gaezh,
Pell em eus ankouaet
E sked bep abardaez !
Met va c'halonig 'yafe fall
Mar kavfen eno unan all
Ganit, Lili Marlên,
Ganit, Lili Marlên.

5

Rak e don va spered
Ha dalc'hmat em c'hreiz
Eo da zremm venniget
A welan noz ha deiz.
Emberr, — Ya, selaou 'ta ouzhin !
Dindan al letern kozh e vin
Vel kent, Lili Marlên
Vel kent, Lili Marlên.

(Lakaet e Brezhoneg gant Jakez KONAN.)